

## 89 - Kloareg Landreger - *Le clerc de Tréguier*

Elisa MAGOUROU, Kerber (Kerpert) 01.02.1979

Ma zad, ma mamm 'ni - voe ma - doù, 'ni voe ma - doù, 'ni - voe ma - doù,  
 Ma zad, ma mamm 'ni - voe ma - doù, Ma c'has a rênt d'ar skol - la - joù.

Ma zad, ma mamm 'nivoe madoù, 'nivoe madoù, 'nivoe  
 madoù,

Ma zad, ma mamm 'nivoe madoù,  
 Ma c'has a rênt d'ar skolajoù,

D'ar skolajoù 'vit bout beleg,  
 Ma c'halon baour na c'houlle ket.

Pen 'h ê 're all da studio,  
 Me 'h ê war 'ruioù da gano.

Da gano, touo Doue,  
 Da c'helven an diaoul d'am ine.

Ma zad, ma mamm p'e 'deus klevet  
 Peseurt buhe' 'm eus koñduet,

'N 'eus skrivet 'lizher din timat  
 Da zont d'ar gêr da labourat,

Da labourat 'trañch ha palioù ;  
 Kerse 'oe gant ma c'hosti'ou,

'Kichen 'oe bout e Landreger,  
 'Lakat pluñv, liw war ar paper,

Lakat pluñv, liw war baper gwenn  
 Da gas d'am mestrez kêzh da lenn,

Lakat pluñv, liw war baper ru'  
 Da gas d'am mestrez kêzh diouzhtu.

Mon père et ma mère avaient du bien, avaient du bien,  
 avaient du bien,

Mon père et ma mère avaient du bien,  
 Ils m'envoyèrent au collège,

Du collège pour être prêtre,  
 Mon pauvre cœur ne le voulait pas.

Quand les autres allaient aux études,  
 J'allais chanter par les rues,

Chanter, jurer (le nom de) Dieu,  
 Appeler le diable sur mon âme.

Mon père et ma mère, quand ils ont appris  
 Quelle vie je menais,

M'ont écrit une lettre bien vite  
 Pour venir à la maison travailler,

Pour travailler avec la tranche et les bûches ;  
 Mes côtes étaient pleines de regret,

Comparé à ce que je faisais à Tréguier,  
 Mettre de l'encre (avec) une plume, sur du papier,

Mettre de l'encre (avec) une plume, sur du papier blanc  
 Pour l'envoyer à lire à ma pauvre maîtresse,

Mettre de l'encre (avec) une plume, sur un papier rouge  
 Pour l'envoyer à ma pauvre maîtresse tout de suite.